

BREZELL AR CHIN

HAG ANN TONKIN



Ton : *Guerz an Tunisi*, pe : *Ar Sergent major*.

Me a zo breman pedet, gant tud a Vreiz-Izel,
Da zevel eur werz neve divar-benn ar brezell
Zo tri bloaz zo digoret 'tre ar Frans hag ar Chin,
Ha da genta a sounjet ne oa 'met ann Tonkin.

Abalamour a renkann tamal h' gouarnamant,
ENN eur zevel anezhi em euz kalz nec'hamant,
Ha koulskoude a renkann 'laret ar wirionez,
Diskuilla he droiou kamm gand he fallagriez.

Ar c'hommandant a Rivier, gand he holl zoudardet,
Zo bet, dre drubarderez, ar c'hènta oa lazet,
Hag ann admirail Courbet a c'houlenne neuze
Mont gant he vartolodet da reiza ann dud-se.

Dek hag ugent a gontet a oa o vrezelli,
War tachennou ann emgann a eneb peb hini :
C'hoaz ho dije ho lazet, hep damant na truez,
Panefe Julik Ferry gant he goumpagnunez.

Ferry, gant he vinistred, 'lare d'ann admirail :
« Arabad 'be didruez, gwuelloc'h ez eo gedal ;
« Na gand aoun ma ve brudet hon defe-ni brezell,
« A ve gret d'eomp dilezel hor boued hag hor rastell. »

Ann admirail a nevez dezho a lavare :
« Enn han' Doue, hon lezit da skoï prim ar re-ze ;
« Emaint oc'h ober forchou, o teski soudardet,
« Va-unan'm bo ket awalc'h, eur wech vint grouiennet. »